

B U E Z
 AN OTROU SANT EFFLAM,
 PATRON PLESTIN.

Var ton Guerz Sant JULIAN.

SELAOUIT oll a vir galon
 Buez Sant EFFLAM, hor Patron ;
 Eur Vuez gaër hac admirabl,
 Da hout eu Plestin desiraabl.
 Desirabl ve, me a greie,
 He gout partout dre ar c'hontre,
 Evit alumni er galon
 Da Zant EPFLAM devucion.
 Pepini sur a zeziro,
 Goude clêvet e viraclou,
 Renta servich bemæc dezàn.
 Qeit ba ma vezò er bed mân.
 Commançomp qenta lavaret
 E voa brezillon diremet
 En Hiberni hac en Bro-Zos ;
 Ne voa muy na peoc'h na repos;
 Qer sclasses voa o c'halonou,
 Ma seljont oll ous an êr-vou
 Da c'houlen pardon ous Doue ;

[2]

Misericord ha trugare.

Hôr Zalver, leus a gasante,

A zellas oute a drue,

O rey Dofin d'an Hiberni.

Ec'h eure d'ar brezel cessi.

Fatiguet voa ar Rouane;

Ma sijont ar peoc'h entreze

Da rey d'o sobl paciantet,

Pa voant ganter Doue inspriet.

Evit brassoc'h fidelite,

E concluas ar Rouane

Var ar sujer da zemezi

Ar Prinç EFFLAM da HENORI.

Cetu quiét an oll armou,

Cetu cessen ar brezellou,

Cetu pariout ar peuc'h sinet,

Eus a bell amzer desitet.

Ar Prinç EFFLAM neve ganet.

A voe bep mar qen instruet,

Ma surpassé en vertuziou

Cos ba yvouanq an oll er vro.

Rêy a garie aluzennou,

Ober ôrêzon ba yvaniou;

Evelse en em dispose

Da renta servich da Zoue.

Credit evit tra assuré

Ec'h instrue e oll Brincet

Dre'r vertuziou a bratique,

O caret zervicha Doue.

[3]

Un deiz oute e conferas,
Hac o avis a c'houennas
Da guittât vanile ar bed,
Da ze voa en em resolvet.

Gant abondanç eus a zaeroù
E renijont da Zoue grācou,
O prometi d'o messtr ec'h ajen
E voa qeument a zesirent.

EFFLAM e zaouarn a juntras,
Ha da Zoue grāç a reotas
Da veza gantam inspinet a voa
Da zortial demeus ar bed.

Sonjal a rejont er voyen
En pe fêçon ar mōr tremens
Mes dre bermision Doue
Voe retardet o bolonie.

Ar Roue e Vab a c'halvas,
Hac e avis a c'houennas
Evit consanti eureuji
D'ar Brjaces yaouanq-HENORI,

Evit ne voa e volonie,
E consantas dre c'braç Doue,
Evit d'e dad oboissa,
Ha miret ous annui dezâ.

Prest e voe grêt an depechou,
Gant r̄ejouissanç ha pompon,
Gant dilijanç d'o eureuji,
Gant ur joa vrás en Hiberni.

Er memes deiz êru an nos,

[4]

E voejont casset da repos,

Hac e lavaras d'e bried

Ar pez a voa en e speret.

HENORI o veza clêvet

Ar proposiou eus be fried,

D'en em estoni he teuas,

Ha da veza contristet bras.

En gant an aon na gontsantje

Miret eveltan't chastete,

En devoe prest queuz d'e gomzou;

Hac e sonjas quiât ar vro.

Evel ma he santas cousgat,

Eq em rentas gant e Brincet

En ur batq fichez da vonet

D'ar plaç ma vijent inspiret.

Cunduet e voent gant Doué,

Ha renter prest en ur c'hontre,

En bent bras e penn al Léo-Drèz

A Lannion da Voritroulez.

Pa voant eno en em rentet,

Ha tost d'ar forest disqennet,

Dirac ur roe'h hanvet Qerlas,

Ul loën horrubl a drémenas.

Guelet a rejont un dragon

Ous en em denn en un toul don,

Da ur c'havarn var dro mil pas

Dious al lavaret roc'h Qerlas.

Nao iliñad eus a zonter,

Hac a lec'hed daouzec antier

[5]

En d'oa ar c'havarn ma loje ;
Ervez ar scrit eus ar Vue.

Gant aon ma vije attaquet
Goude ma vije antreet,
Gant finesse , evel al lern ,
E yê a recul er c'havern.

Er bla pêvar c'hant anter cant ;
Artur , courajus ha vaillant ,
En em blije da chasseal
Ar serpentet ha monstrou al.

En abondanç e voant dre'r vro
Er c'hoajou bac er forestjou ;
Ha desolet voa ar c'hontre

Gant un nombr bras a loëned goe ;
Pa dremene EFFLAM an Trèz ,
Heuillet gant e gompagnuez .
Ar Roue Artur a rancontras ,
Asistet gant Otrone bras.

Pa voe saludet gant EFFLAM ,
Hac hanvet dezàn tad'ha mam ,
E tisclêrias c'hoas ar sujet
Da veza en Breiz disqenñet.

Artur souden a zisqenpas
Divar varc'h , bac et yxiatas
Gant calz eus a rejoüissanc ,
Dre má yoant a un alianç.

Pourmen a rejont spas amzer ;
Gant discoursiou guel famillier ,
O comz demeus o alianç ,

[6]

Gant plijadur ha confianç.

Pa voant dirac toul ar serpant;

E lavaras Artur d'ar Zant:

„ Estonet bras en em gavàn

„ Rac ma credit bale amàn.

„ Hac e credit, eme'r Roue;

„ Chôm quer tost d'ar monstr-cruel-ze,

„ Hep morc'het ha gant assuranc !

„ N'er graen quer hep asistanç.

„ EFFLAM dezàn a respondas :

„ Beza hon eus un Doue bras,

„ Un Doue bras hac hor miro

„ A bep perill ha danjeriou.

„ Guelet hon eus ous ur forest

„ Ur monstr o sortial, ha prest

„ D'e gavern eo en em dennet,

„ Hac a recul eo antreet. „

A bel amzer en devoa c'hoant

Artur da gaout ioul ar serpent,

Ma pedas EFFLAM da zisque

Ar c'havarn ma en em rente.

Pedi ras ar Roue Artur

Da guemeret ar blijadur

Mar pliche gantàn ur pennad

Da velet r  y d'ar monstr combat.

Neuze souden e comman  as

Ar Roue gant ur gourach vras,

Dre ma voa ha cr  n ha puissant,

Da r  y attaqou d'ar serpent.

[7]

Un deiz antier a implias
O combat, hep ma paouezas ;
Qer fatig voa o combati,
A ben ar fin ne aille mui.

Da guichen EFFLAM e tosiâs ,
Ha var ar yêod en em dolas ,
Gant qement demeus a zec'het ,
Monet pelloc'h n'e alle qet.

Sant EFFLAM , gant truez outâ ,
Pa na gave dour da eva ,
A bedas Doue evellen ,
Hac exocet voc e beden.

„ Otrou , pehini a netra
„ Oc'h eus crôuet oll ar bed-mâ ,
„ Me o supli hor zoulajit ,
„ Hac hor pedennou exocit .

„ Pep tra oll deoc'h a obois ,
„ Evel ma tisq deomp ar feiz ;
„ Dour en desert o poa roet
„ Da Voyses ous e zec'het .

„ Plijet ganeoc'h ive , Otrou ,
„ Dre ho Passion , ho meritou ,
„ Ho Mab uniq hac hor Zalver ,
„ Rêy bremâ dour d'o servicher .

Goude ec'h eure Sin ar Groas ,
Ha prest var ar roc'h e scoas
Da ben reir guech ganv e vourdon ,
Goude beza grêt orêzon .

Eur bouill douç sclêr a zortias ,

[S:]

A rē gende miraclou bras
D'ar belerinet a deue
Gant devocion d'ar plaç-se.

Sourcen an dour a veler c'hoas
En Toul-Efflam var an hent-bras,
Ebars en antre al Léo-Drèz,
A zeo en distro Moutroulez.

Pa velas Artur ar miracl
E scoas var e esjomac;
D'an daoulin prest en em dolas,
E asistanç a c'houlenoas.

„ Hor zicourit ous-ar serpant,
„ Ni o supli, c'houi, Princ vaillant;
„ Ni a vel-sclér oc'h eus galloud
„ Hac a ya bremā en hon iout. „

EFFLAM en devoa a galon
D'e asista intacion,
Hac a bromelias er rajes
Gant ar c'hraç demeus a Zoue.

Tremen a eure oll an nos
Ep monet-camet da repos,
Epad an nos en orézon,
Evit guir béparation.

Pa voa deut antionos mintin,
En eur stoùas var e zaoulin
Prest dirac cavarin an dragon
Ec'h eure c'hoas e orézon.

Neuze d'at serpant ec'h ordren
Sorjal prest eus e gavrin,

[9]

Hac e sentas ous e gomzou,
Dre c'hraç Doue ar guïr Orrou.

Neuze ec'h euse orêzon,
Hac e lavaras a galon
Ar c'homzou varlerc'h raportet;
Selaouit-he hac ententet.

„ Jesus, bon Roue éternel,
„ C'houi lavaras doc'h Ebrestel
„ Extermina en oc'h hano
„ Ar serpentet hac ar monstrou.
„ Plijet ganeoc'h ite clêvet
„ Hon regejou deoc'h adresset;
„ Plijet ganeoc'h deomp otrei
„ Bea delivrer dious annui.
„ Mirét thions droug tud ar c'hanlon
„ A recevoni dious an dragon,
„ Evit gallout ho servicha.
„ Qêita ma vefomp er bed-mâ.
„ C'houi zo gant ho Tad éternel,
„ C'houi zo gant ho Speret-Saniel
„ O veva, o rën assambles
„ Evit ur birviqen james „ Amen.
Pa voe achiu e orêzon.

E pign var ur roc'b an dragon,
Hac e sellas a bep coste,
Pa voe pignet var ar goure.

Hac én da c'brigonch. da yudal,
Un dra horrubl eo e zonjal;
Qer crén, qen terrubl e crias,

[10] .

Ma voe clêvet eus a bel bras.

Goude ze e benn a stôdas ,

Goad en abondanç a rentas ;

Neuze en Trèz e tisqennas,

E yas er mōi, en em veuzas.

Ar Roue Artur pa velaś.

E rē EFFLAM miraclou bras ,

A rentas prest an ol graçou

A voa possubl d'e veritou.

Neuze d'ar guêr e-tistroas

Gant contantamant ha joa vrás,

O velet fin eus au diagon ,

En devoa noazet er c'banton.

Eno e tremenas an nos.

EFFLAM gant neubeut a repos.

Hac antronos , qent ma flachas ,

E ofic c'hois a lavaras.

Goude ze e yas da bournen

Vår goste an od pen-da-ben ,

Da choas ur plaq a dost d'an Trèz ,

Dezàn ha d'e goimpagnunez.

Etal eur vœiz en em gayjont ,

Bete he zourcen'e hejont ,

Ma voa ur plaq qement d'o grat ,

Ne deurvejont qet e guittât.

Eno e teurvejont sevel

O Hermitach hac ur Chapel

Da zervicha Doue bemde ,

Assambles enpad o hue.

[11]

Antroncs goude o feden
 Ec'h ejont are da bournen.
 Hac int caout eur bouill dour evà,
 Evit en em rafrechissa.

Eva a rejont añezi
 Peb a vanne mad pepini,
 Hac an dour-ze o zoulajas,
 Ha rafrechisset o rentas.

D'o hermitach e tisstrojont,
 Ha lein preparet a gavjont,
 Un Æl en qichen azeet
 Var ar yêod glas a dost d'ñ boued.

Qer brillant vos sclérijennet,
 Sellet outan ne aillent qet;
 Ne aillent qet tosiât ouïâ,
 Qement' râ c sclérijenna.

Neuize dezo e lavaras?
 „ Tostaît, tud'a istim vrás,
 „ Da zebn bardiment ar botied
 „ A velit amàn deoc'h ficher.
 „ Eul lein a zo deoc'b 'préparet
 „ Gant hor maguer, Crouter ar bed,
 „ Pa oc'h en em rentet dezàn,
 „ Ha dilezet oil ar bed-màn.
 „ Me a zo déut d'o servicha,
 „ Hac a zo digasset gantâ
 „ D'o consoli hac ho Princet,
 „ Bars en exil oc'h eus choaset.
 Goude prest e iñsparissas,

[12]

Hac en jóa vras en o lezas ;
 En ur joa vras spirituel
 Annoncer dezo gant an Æl.
 Goude beza rentet graçou
 Da Zoue eus e faveurjou,
 EFFLAM an dol a viniguas ;
 Hac e qeñerjont o repas.
 Goude o fred en em glêvjont,
 Ha da yun en em avisjont :
 D'al lun, d'ar merc'her, d'ar guener,
 A yiqen enpad o amzer.
 Neuze Doue a gonfirmas.
 O desseign gant miraclou bras,
 O rîy an deiziou ze dese
 Da zebri digant an æle
 Ar graçou hac ar faveuriou
 A rerevent eus an ênvou,
 O laqas neuze da zonjal
 Ne dîeyent qet clasq' ur plaç-al.
 Crêdi a rejont an draze
 E voa agreabl da Zoue
 E chomjoni er plaç-sé ato
 D'e zervich bete ar mao.
 Oza a rejont ar Clap'el
 A voa elo abaouë pel,
 Achui o c'habinejou.
 A bep tu desi tro var dro.
 Chom a rejont neuze eno,
 Guinui o fedeuñou,

Ha

[13]

Ha monet d'ar Chapel bemde,
D'an ofic enpad o bue.

Bep sul, bep meurs ive bep yaou
Ha bep sadorn sur bep nep gaou,
Ecavent o boued préparet
Grêt gant an El er gabinet.

Pa voant eno en santelez,
EFFLAM hac e gompagninez,
Gant an oll a dosi bac a bel
Voant admirer en Breiz-Izel.

Cetu un hermit éruet
En devoâ eno habitt,
Un Hermit hanvet Sant Gestin
En eus ur Chapel en Palestîn.

Gestin dious Rom pa zistroas,
D'e blaç are a reornas,
Evit qemeret e repos,
Ha tremen ennân deiz hâ nos.

Mes Sant EFFLAM a voâ ennân,
Ma lavaras Gesuin dezân :
,, Va breur qèr deut mad râveet,
,, Va flâç so deock, ne flachit qet.

,, Evit beza ar plac indign
,, D'o possedit gant och oll drecin
,, Habitei-an Bele mervel,
,, O c'hortos et gloar éteivel.

EFFLAM érmès a zoitas.
Ha da Gestin a résponias :
,, Tad venerabl just ve lezeb

[14]

„ Ho ti ganeoc'h ; c'houi deu a bel.

„ Me zo crèn, dispos ha yaouanq,

„ Hac a rēy, prest eur vatimañt ;

„ C'houi zo fatiguet gant an heur ;

„ Chomit amān, me ya em hent. ”

Gestin dézant a respontas :

„ Va escusit, n'e dec'hit pas ;

„ Eur plaç all me a bourveo :

„ Chomit en oc'b exercicou. ”

Ha pa voant o daou en divis

Piou a dec'hje dre honestis,

Un Æl dezo a barissas,

Hac evellen a lavaras :

Gonde beza grêt ar zalud,

E voa agreabl o disput,

E voa agreabl da Zoue,

Cetu amān e volonté.

„ Ordre et en deveus Doue

„ Ma chomo EFFLAM er plaç-se ;

„ Ha Gestin en em reiro

„ D'ar forêt nessa zo vardo. ”

Pa voa dispartiet an Æl

E rentjont grâc d'an Eternel,

Da veza dezo disclêiyet

Ar pez a voa en o souhet.

Gestin a guemeras conje

Digant Sant EFFLAM en heur-ze ;

D'ar forêt noss en em rentas,

Hac en sanctiez a vevas.

[15]

Hor Zant EFFLAM a dremenat
 Ar fest e amzer en e blaç,
 Qen a voe galvet gant Doue,
 Dre eur c'hlénvet bian goude.

Var e varo ec'h exhortas
 E Zisqibien, hac a zentas,
 Da berseveri er plaç-se,
 Qen a vije fin d'o bué.

En e Chapel voé entéret
 Gant e vreudeur asistantet,
 Ar chouec'hvet deiz eus a vis Du,
 Tud en em rente a bep tu.

Qément a voe a viraclou,
 Ma teue tud eus à bep bro;
 Ma voe sonjet eno sevel
 En enor d'ar Zant ur Chapel.

C'hoarvout a eure hep douetanç;
 Dre bir amzer ha neglijanç,
 Ma voe neglijet ar plaç-se,
 Hep nep mancion er c'hontre.

Goude e revelas Doue
 Ar zantelez eus ar plaç-se
 D'un den zantel voa er c'hontre,
 A dost d'ar Chapel e chome.

Né voa qet assur an den-ze,
 Ervez ma lenner er Vue,
 E vije eno habiter,
 Nac e vije-bet entéret.

Bep sadorn e voa custumet

[16]

Ba scuba, guech' ne vanqe qet;

Ha pa scubas ur cerren de,

E tevas goad eus ar pave

Estonet bras deineus a ze,

E laqas evez mad goude,

Hac e vele canticui;

Ia ha mèmes e cresqi...

Sonjal eure neuze confer

Gant Pol, Escop eus a Dreguer;

Ha pa voe dezàn discléryet,

E conferas var ar sujet.

Confer eure gant ar Chabistr

A ur sujet a voa qer trist;

Ber avis ar re savanta

Dre'n Escopi var guement-mâ.

Dre o avis en em rentas

En Plëstia; hac e publias-

Ober trï yun hac orêzos,

Gant calz eus a rezpcion.

Goude-ze e courc'hemeñhas

Ma vije toullet prim ar plac

A beini e sortie

Ar goad eno a remerqe.

Caver voe beuze er poull-ze

Corf Sant EFFLAM hac e Vue

En e archet gant e hano,

Cetu bepret ar miracloù.

Gant calz a enor ba respect

Demeus ar doull e voe sayet,

[17]
 Ha douguet d'an Ilis Paros,
 E gotf zd eno o repos.

En Plestin èr Be gourceet,
 Gant dreillou ouard goloet,
 Emedi Corf hor Zant Patron,
 Rentomp dezàn dévotion.

Giêr zotend miraclou bras,
 Hac a guniñu bepret c'hoas,
 Dre e faveur ha meritou ;
 Rentomp oll da Zoue graçou.

Rentomp dezàn ive servich,
 Me ho supli oll, Pléstinis,
 Ma veritimp e asistanç,
 Hac êruout en e bresanç.

E c'balloud zo bremàn qer bras
 Ha ma eo bet james biscoas ;
 Nep gant fianç er goulenno,
 Me oc'h assur en o c'hlêvo.

Guelit že dre experianç,
 En andret calz e asistanç,
 A dost a bell en eus clêvet
 Ar beden dezàn adresseset.

Ne lezompa nep deiz da drême
 Na rêyo pepini peden
 Gant fianç hac a vir galon ;
 Clêvet vero hon oreson.

Assuret én hor c'bunduo
 Fidelament en hon œuvtoi
 Ma veritomp oll, qent mervek,

[18]

Possedi ar Gloar Eternel.

Fin.

B U E Z

S A N T E Z H E N O R I ,

PRIED DA ZANT EEFELAM ,

Pehini he deus ur Chapel e Paros Plestine .

Var ar mèmès ton .

SELAOU ha compren a galon ,

Disq , mar ac'h eus devocion ,

Ur G'hantiq zo nevez formet ,

Da HENORI ha d'e Fried .

En amzer ar Pab Sant Leon ,

Tad-koz an Otrou Sant EEFELAM ,

En devoaz brezel ha combat ,

Cuntinuel bete ar goad .

Qement a voa a vassacrou ,

Qement demeus a valeuriou ,

En Bro-Zoz bac en Hiberni ,

Ne vouiet en spe du trei .

E zezir voa cuntinui ,

Ou ar Roue Tad HENORI ,

Cuntinui bete'r maro ,

Ha conservi bepret e vio .

Succedi eure d'ar gurun ,

Succedi ive d'ar fortun ,

Tad Sant EEFELAM , ar Princ vaillant ,